

STATUDOÙ
OFIS AR BREZHONEG
OFFICE DE LA LANGUE BRETONNE

MELLAD 1 : ANV

Savet ez eus ur gevredigezh hec'h anv "OFIS AR BREZHONEG, OFFICE DE LA LANGUE BRETONNE", hervez lezenn ar 1^{añ} a viz Gouere 1901.

MELLAD 2 : PAL

Anavezout ar brezhoneg, studiañ e stad hag e gas war-raok war gement tachenn zo, dre an holl doareoù azas, war pemp departamant Breizh peurgetket (Aodoù-an-Arvor, Penn-ar-Bed, Il-ha-Gwilen, Liger-Atlantel, Mor-Bihan) eo pal ar gevredigezh.

MELLAD 3 : PAD

N'eus lakaet termen ebet da bad ar gevredigezh.

MELLAD 4 : SEZ AR GEVREDIGEZH

Diazezet eo sez Ofis ar Brezhoneg 8 bis, straed Félix Faure e Karaez-Plougêr (29270).

MELLAD 5 : IZILI

Ar gevredigezh a zo enni izili oberiant o paeañ o skodenn bep bloaz. Ar C'huzul-merañ a ziviz pegement eo ar skodenn. Pep ezel a rank ober diouzh ar reoliadur diabarzh.

MELLAD 6 : DONT DA VEZAÑ EZEL

Evit dont da vezañ ezel eus ar gevredigezh e ranker bezañ degemeret gant ar Burev a ziviz, bewech m'en em vod, war ar goulennoù emezelañ nevez.

MELLAD 7 : PAOUEZ A VEZAÑ EZEL

Paouez a reer a vezañ ezel :

Pa roer e zilez ;

Pa'z eer d'an anaon ;

Pa vezer lakaet er-maez gant ar C'huzul-merañ dre m'eur chomet hep paeañ ar skodenn pe evit abegoù grevus.

An neb a vez lakaet er-maez a vez kelaouet dre lizher erbedet ha pedet da zisplegañ e zoare dirak ar Burev.

MELLAD 8

Ar servijoù da heul, peurgetket, a ya d'ober Ofis ar Brezhoneg :

- Arsellva ar Brezhoneg
- Glad Yezhel
- Treiñ-Aliañ
- TermBret, kreizenn dermenadurezh
- Ajañs Diorren

MELLAD 9 : KUZUL SKIANTEL

Ofis ar Brezhoneg a zo dezhañ ur C'huzul Skiantel. Ennañ e kaver 15 arbennigour, anvet gant ar C'huzul-merañ evit daou vloaz.

Ouzh e ober e vo, diouzh un tu dileuridi aozadurioù dave war tachennoù obererezh an Ofis (Skolioù-meur, CNRS hag aozadurioù all degemeret gant ar C'huzul-merañ) ha diouzh un tu all hiniennoù anavezet o barreezh anvet gant ar C'huzul-merañ.

Reiñ a ra izili ar C'huzul Skiantel o ali a-zivout al labourioù kaset da benn gant ar strolladoù labour, diazezet gant ar skipailh pad.

Reiñ a ra ar C'huzul Skiantel e ali a-zivout roll obererezh an Ofis.

Gant ar C'huzul Skiantel e vez anvet ur c'hadoriad da bep emvod. Aotreet eo izili ar skipailh pad da gemer perzh en emvodoù an arbennigourien, da reiñ o ali.

Pediñ arbennigourien e diavaez an Ofis (ensavadurioù enklask, skolioù-meur...) a c'hell ar C'huzul Skiantel.

Ne c'heller ket bezañ ezel eus ar C'huzul-merañ hag eus ar C'huzul Skiantel war un dro.

MELLAD 10 : MEREREZH AN OFIS

Meret eo Ofis ar Brezhoneg gant ur C'huzul-merañ hag ur Burev.

MELLAD 11 : AR C'HUZUL-MERAÑ

Ar C'huzul-merañ a zo ennañ etre 12 hag 21 ezel dilennet hag o tileuriañ an holl gennadoù o kas ar brezhoneg war-raok.

Evit tri bloaz e vez dilennet an izili-se da-geñver an emvod meur. Addilennet e c'hell bezañ an izili.

O vezañ ma vez adnevesaet an drederenn eus ar C'huzul bep bloaz, e dibenn an daou vloavezh kentañ e vo tennet an izili o kimiadiñ d'ar sord.

Mar c'hoarvez d'ur sez bezañ vak e kav ar C'huzul un erlec'hier da c'hortoz. Da-geñver an emvod meur kentañ e vez dilennet an erlec'hier da vat. Mont a ra galloudoù an izili dilennet evel-se da get d'ar mare ma oa da echuiñ leuriadur an izili erlec'hiet.

MELLAD 12 : MONT EN-DRO AR C'HUZUL-MERAÑ

Div wech ar bloaz d'an nebeutañ en em vod ar C'huzul-merañ e dalc'hoù ordinal, bep tro ma vez galvet gant ar Prezidant, pe diwar c'houlenn ar c'hard eus e izili.

Diouzh muianiver ar mouezhioù e vez kemeret an disenteziou ; ur pouez-dreist a zo gant mouezh ar Prezidant ma vez daouhanteret niver ar mouezhioù. Ne c'hell ket bezañ muioc'h eget ur galloud votiñ gant pep ezel.

Kement ezel eus ar C'huzul a chom hep kemer perzh e tri emvod lerc'h-ouzh-lerc'h, hep digarez mat, a vo sellet outañ evel ouzh unan en deus roet e zilez. Tro a vo neuze da lakaat unan all en e blas hervez reolennoù ar mellad 11.

Izili ar Burev a vez dilennet e-touez izili ar C'huzul-merañ.

Kefridioù ar C'huzul-merañ eo :

- degemer ar reoliadur diabarzh kinniget gant ar Burev,
- klevet danevelloù ar Burev diwar-benn stad ar c'hef ha buhez ar gevredigezh hag ivez danevell obererezh ar Rener,
- reiñ e soñj war ar roll obererezh prientet gant ar Rener, ar Burev hag ar C'huzul Skiantel ha war ar raktres budjed kinniget gant ar Prezidant
- degemer kontoù an embregvezh.

Gant ar Burev e vez savet roll-labour ar C'huzul-merañ.

MELLAD 13 : AR BUREV

Evit bloaz e vez dilennet ar Burev gant ar C'huzul-merañ.

Ennañ e kaver an izili-mañ :

- Ur prezidant(ez)
- 3 besprezidant(ez)
- Ur sekretour(ez)
- Un teñzorer(ez)

Teir gwech ar bloaz d'an nebeutañ en em vod ar Burev hag ivez bep tro ma vez galvet gant ar Prezidant diwar e intrudu.

Evezhiañ a ra ouzh ar raktres budjed prientet gant ar Prezidant hag ouzh ar roll obererezh kinniget gant ar Rener hag ar C'huzul Skiantel.

MELLAD 14

Hervez an ezhommoù hag evit bezañ kuzuliet e c'hell ar Prezidant pediñ n'eus forzh peseurt den, ha pa ne vefe ket ezel eus ar Burev pe eus Ofis ar Brezhoneg, da emvodoù ar Burev, ma kav dezhañ e vo talvoudus evit kas da benn vat kefridioù Ofis ar Brezhoneg.

Gant ar Prezidant hag ar Sekretour e vez sinet an danevelloù.

MELLAD 15 : EMVOD MEUR ORDINAL

Holl izili ar gevredigezh a gemer perzh en emvod meur ordinal a vez dalc'het ur wech ar bloaz.

Gant ar Prezidant e vez galvet izili an emvod meur, pemzektez d'an nebeutañ a-raok an deiziad merket. Displeget e vez ar roll-labour er bedadenn.

Ar Prezidant, a-gevret gant izili ar Burev, a ren an emvod hag a daolenn stad buhez ar gevredigezh. Gant an teñzorer e vez rentet kont eus ar mererezh da izili an emvod ha lakaet degemer kontoù ar bloaz ganto.

MELLAD 16 : EMVOD MEUR DREISTORDINAL

Ma vez ezhomm, pe diwar c'houlenn an hanter mui unan eus izili ar C'huzul-merañ, e c'hell ar Prezidant gervel un emvod meur dreistordinal, hervez ar furmeladoù meneget er mellad kent.

MELLAD 17 : REOLIADUR DIABARZH

Ur reoliadur diabarzh a laka sklaer doareoù resis mont en-dro an Ofis.

Gant ar Burev e vez savet ar reoliadur diabarzh ha degemeret e rank bezañ gant ar C'huzul-merañ gant muiañ niver dreistel an izili o kemer perzh pe dileuriet. Hervez ar memes diarbennoù e c'heller kemmañ tra pe dra er reoliadur.

MELLAD 18 : PEADRA

Peadra ar gevredigezh a zo anezhañ :

- Sammad ar gwirioù emezelañ hag ar skodennoù,
- Skoaziadoù ar Stad, ar Rannvro, an Departamantoù hag ar C'humunioù,
- Pinvidigezhioù o tont diwar hec'h obererezh,
- Pinvidigezhioù all aotreet gant al lezennoù.

MELLAD 19 : DIVODAÑ

Ne c'heller divodañ an Ofis nemet dre zisentez an Emvod Meur e-kerzh un emvod dreistordinal galvet a-ratozh hag ennañ d'an nebeutañ an hanter mui unan eus an izili paeet o skodenn ganto ha goude ma vefe bet votet a-du gant muianiver an div-drederenn eus an izili deuet d'an emvod.

Ma ne vez ket tizhet an niver ret e vez galvet an Emvod Meur en-dro ha kement-mañ dindan ur miz. E zisentez a vo lakaet da dalvezout neuze n'eus forzh pet ezel a vo deuet d'an emvod.

Mar bez divodet ar gevredigezh e vo adrannet arc'hant ar c'hef ha madoù ar gevredigezh etre hec'h arc'hantaouerien a-genfeur gant lodenn pep hini anezho.